



Intanv al Lochen

I

Er bed-ma nag aour nag arc'hant
No deuz biskoas chalmet va c'halon.
Me 'zo eur paour-keaz paysant,
Kountant oun 'barz em c'hondision,
Maez va fried karantezus
A gollan hirio, pebez anken !
Guelit a n'oun ket malevrus :
C'huec'h krouadur a meuz em lochen ! (*bis*)

II

En amzer m'oа beo va fried
He furnez a chalme va c'halon ;
Va bugale ouз va c'haret
A roe d'in consolation ;
Ha bep eil oll e poken dezhe :
Eun tad evrussoc'h ne vo biken !
Dre ho iezou tener, bemde,
Oun c'hoaz evrus ebarz em lochen. (*bis*)

IV

Mar galfen eb re a vizer
Sevel ha deski va bugale,
Me a c'halfé gant an amzer
Fortunia va merc'hic marteze ;
Neuze va faotred a vezoz braz,
Capabl da labourat an dachen ;
Hag em c'hozni me 'c'halfé c'hoaz
Beva evrus ebarz em lochen. (*bis*)

III

Bep mintin pa zan d'ar parkou,
Adarre da gommans va dervez,
E lezan va bugaligou
Euz va zi da gemeret evez.
Ha d'ar pardaez, pa vezan distro,
Evit va fellaat deuz an anken
En em stardont oll var va zro
D'am c'honsoli c'hoaz 'barz em lochen. (*bis*)

V

Em guele douar pa vezin
O repos e guered Rumengol
Plijet kemper truez ouzin,
O va mam, Itron Varia Remed-oll !
Ha pa deuio va Bugaligo
Var va bez da ober ho feden,
Autrou Doue, c'hui bardouno
Da ene paour intanv al lochen. (*bis*)